

YF_0054_Kanaouenn ar marc'had du

Dond a ran da gontan deoh eun nebeud marvailhou
War sujed ar marc'had du a zo bet e-barz on bro
E-pad ar brezel on-doa gwelet, a bep seurt trafikou
Evid sikour ar boched da zebrin deom on bro

Komanset e oa ar marc'had du gand an enebourien
Da haloupad er hampagn ya gand o malizenn
Toud e oant mad evito, amann, hoc'h, loueou
Evid privan ar vugale, du-ze e-barz ar heriou

Toud e oant raflet ganto evid rein d'ar barizianed
Aliez dre preferans, e vijent roet d'ar boched
Rag klevet on-doa kaozeal deuz mil lur dre penn
E oant lakaet da baeon eun toullad ofisourien

Ya gwelet on-eus aliez, o du-man e-barz on ker
E-pad an deiz, viou fritet o vond er balouer
Viou fritet, likeuriou a yae e-barz korv ar boched
Bara du hag ar chistr put a oa mad d'ar Vretoned

En em lakaet en-oa kalz a dud d'ober marc'hadourien
Ha d'ober kenwerz an hoc'h evel d'ar boucherien
Partoud e vije installlet ganto eun abattoir
Hag aze e oa aez d'ober ar « marché noir »

A kazi tout a renez e oa soignal ar friser
A kargan o musetten da ganfardet Hitler,
Alies a mamp gwelet karget de o musetten
Evel chasse tebint saucisson en ur vond gand ur placen.

Ya en em foeltret dije awalc'h da haloupad er vro
Da stlejan treou d'ar boched da gargan o bouelou (= bouzellou)
Pa oa liberet ar vro e oant discouraget
Rag ne oa ket memez profit da heuilh ar batrioted

E-pad an okupasion ez eus bet amzer vad
Mond a rae toud an amann evid prenan dilhad
Ar bleud gwenn hag ar hig sall; pemp pe c'hwec'h lur amann
A-benn e oa kavet bragou nevez da Jakez pe da Yann

Pa zeuem e-barz on ker e oam prest da goll on 'fenn
Oa ket moyen da gaoud eun tach nag ivez eur boentenn
Tout juste ne valeem ket diarc'hen (divotou), ha dichupenn
Pa vanke on zamm amann, n'on-doa netra war on c'hein

Doned a reomp e-barz en ker gand amann ha poulet
Nemet an hini n'en-doa ket, e oa trist e zoare
Kar bezan a oa aman tud gand o conscience ledan
Hag o-deus bet graet ur Jak gand al labourerien.

An dud a feson a lavare, ya an eil d'egile
Etre ar Fransizien e oa trist o gweled kement-se
Ya gweled e-barz ar heriou bugale ar bevien (ar bevin ?!)
Bezan privet deuz o amann evid rein d'an enebourien

A tout a rez e gomzan dec'h e oa zikour ar boched
Evid dalc'hen an ne no nerz da pilat a russed
Ha koulskoude mamp gwelet pe oa liberet ar vro
An drapeau russe voa ar brasen e-barz no frenestrou

Breman emaint dre aze oh esean prenan toud an traou
Dilhad kaer dond da vale hag ivez otoiou
Na houlent ket labourad nemed « ober la foire »
O klask gouzoud peseurt feson e vo graet ar « marché noir »

A profitourien ar brezel hidu an de a zo fier,
Zavat e deuz toud o hein ia dre hras an Hitler.
Nemed nechet ez int erru gand o brahello paper
Red eo lared zo profited deuz poan el labourer.

Met breman e kredan awalc'h e kavint hir an amzer
Rag red e vo a ziousas ober an inventer
Estimet e vo toud an traou hag an inventer vo graet
Hag aze e vo gwelet pelec'h int bet berniet

E-barz ar mod-se marteze e vo gwelet ar brofiterien
Pere o-deus graet fortun gand an enebourien
Ya graet o-deus fortuniou en eur ruinan ar vro
Ha lakaad kaoud 'n aouen partoud e-barz ar heriou

Ha c'hoazh e lavare in dut breman zo daou bloaz zo
Penaos aze war ar hampagn e oa ar billejou
Nemed non trompet e oant bet o ya zur paotred kaer
Gweled a dao ar breven pe oa chanceket ar paper

Nemed jalous e vez toud an dud ya deuz ar beizanted
Pa vezont gwelet e-barz ar marc'had o ya gand o loened
Nemed jamez e vez anviet ar groz deuz o 'foaniou
Evid derc'hel loened mad da labourad er parkou

Kalz bravoc'h eo dre aman bezan o pourmen e-barz en ker
Rag o zreid vezent ket glebiet e-barz en o bouteier
Ha c'hoazh pe teued d'ar foar peuz ket ur c'hanadienne
O nag ur vantel fourrure da lakaad war ho kein

Dond a ran da finisan gand ma hanaouenn
Rag mezuz eo bet gweled toud ar brofitourien
Ya gweled e-pad pemp bloaz, kalz o-deus graet fortuniou
Keit e oa eur rummad all o vervel e-barz o ruiniou

René Le Gac